

Ar VUHEZ

KRISTEN

Kelaouenn ar familhou kristen

a zeu eur wech ar miz



— TAOLENN —

| | | | |
|---------------------------|-----|---|-----|
| D'an daoulin..... | 529 | Eus pelec'h e teu beleien d'an Iliz..... | 535 |
| Evit santelaat ar miz.... | 530 | Teir ave ar forban..... | 537 |
| Deveriou ar c'hristen.... | 531 | Pajenn an Unvaniez kato- lik | 540 |
| Pedomp an eil evit egile | 532 | Re a visteriou..... | 541 |
| Hon tenzor..... | 533 | Digareziou !! | 544 |

RÉDACTION & ADMINISTRATION

Monsieur le Directeur de *Ar Vuhez Kristen*

28, Avenue de la Marne, LORIENT — C/c. 209.81, Nantes.

Koumanantchou

Koumananti a c'heller e pep amzer eus ar bloaz. — Skriva an hanoioù hag an adress fraez ha penn-da-benn ; ma n'eus bureo post ebet er gomun, lakat gant pehini e vez graet.

Koumanant ordinal :

6 l. ar bloaz.

Koumanantchou a enor (2 seurt anezo) :

10 l. ar bloaz.

gant perz e 365 OFERENN (unan bemdez) a vez lavaret bep bloaz evit hor madoberourien.

20 l. ar bloaz.

gant perz e 3650 OFERENN bep bloaz (10 bemdez).

N.-B. — Hol lennerien, m'o deus c'hoant, a c'hell dreizo o-unan rei frouez an oferennoù-se d'o zud varo.

Adkoumanantchou

An neb a vez echu e goumanant, a vez kaset d'ezan dre ar post eur « MANDAT-CARTE » evit ma c'hello koumananti a-nevez. — Arabat eo d'hol lennerien gortoz ma vo kaset d'ezo eun « TRAITE POSTALE » evit PAEA, rak evel-se e kollont 4 lur HEP REZON VAT EBET hag e roont d'eomp eul labour DREIST-ORDINAL HIR HA POANIUS. Ni a gont war o aked ha war o bolontez vat evit paea dioustu.

TAOLIT EVEZ : lavarit atao petra 'zigasit d'eomp : EUN ADKOUMANANT pe EUR C'HOUMANANT NEVEZ ; ma tigasat asamblez adkoumanantchou ha koumanantchou nevez, DISPAR-TIA MAT ANEZO. — Evit eun adkoumanant, rei d'eomp an adress eun EVEL MA OA WAR AN NIVERENN DIWEZA ... ha ma 'z eo ret, goulenn da-c'houde chanj anezi.

Chanj adress

Evit chanj adress, digas d'eomp 1 lur e timbrjou gant an adress evel ma oa war an niverenn diweza.

Liziri ha skridou

An holl liziri ha skridou (koumanantchou, adkoumanantchou, pennadou-skrid evit ar gelaouenn, pedennoù goulennet evit ar re varo pe intansionou all, keleier a bep seurt) a dle beza kaset da :

M. le Directeur de « Ar Vuhez Kristen »,
28, avenue de la Marne, Lorient, Morbihan.
C.-C. 209-81, Nantes.

Ha pa tle ar skridou-se beza embannet er gelaouenn, e tleont beza digaset d'eomp d'an diwezata d'an 8 eus ar miz evit beza embannet e niverenn ar miz war-lerc'h.



D'AN DAULIN !!

*Dispak da chapeled, kouez d'an daoulin ha ped,
Bugel dister ;*

*Kaout a ri nerz kalon da veza trec'h d'ar bed
E pep mister.*

*Dibun da chapeled, kouez d'an daouli ha ped,
Youankiz flamm ;*

*Harpet war brec'h Mari, en da grog gant ar bed,
N'ez po ket lamm.*

*Displeg da chapeled, kouez d'an daoulin ha ped,
Mamm baour, tad kêz ;*

*A-enep d'an trubuilh hoc'h argad, dre ar bed,
E vevoc'h êz.*

*Pok start d'az chapeled, kouez d'an daoulin ha ped,
Den koz, aet fall ;*

*D'it Mari a roio, pa z 'i kuit diouz hor bed,
Peoc'h eur bed all.*

*Da « AVE », pobl kristen, hep paouez a bigno
War-du Mari ;*

*Ha kement war da benn a c'hrasou e skigno
Hag a gari.*

J. L'HELGOUAC'H, O.M.I.

Evit santelaat miz C'houevrer

1° — *Bevomp atao er stad a c'hras,*

2° — *Deomp da gomunia da zeiz gouel ar Chandelour (d'an 2) ; d'ar gwener kenta eus ar miz, pe d'ar sul war-lerc'h ; ha ken lies gwech ma c'hellimp.*

3° — *Deomp d'an oferenn bep sul, ... war ar pemdez ivez, ma c'hellomp, ... atao gant eul leor oferenn. — Na vankomp morse d'ar gousperou dre hor faot.*

4° — *Heuliomp gant evez lezenn ar vijil bep gwener.*

5° — *Kinnigomp hon oberou da Zoue bep mintin, lennomp bemnoz Buhez Hor Salver Jezuz Krist pe Buhez ar Sent, ha lavaromp da-c'houde ar pedennou asamblez.*

INTANSION JENERAL AR MIZ : Ar re a zo e penn ar broiou.

INTANSION EVIT AR MISIONOU : Trubuilhou an Iliz er Chin.

PEDENN DA LAVAROUT BEMDEZ : Kalon Sakr a Jezuz, kinnig a ran d'eoc'h dre Galon Dinamm Mari pedennou, oberou ha poaniou an dervez-man, evit rapari an dismegans graet d'eoc'h dre hor pec'hejou hag evit an holl vennoziou hoc'h eus hoc'h-unan, p'en em ginnig war an aoter. — O c'hinnig a ran d'eoc'h dreist-holl evit ar re a zo o c'houarn ar broiou.

« *Ma ne zebrit ket va c'horf... n'ho pezo ket ar vuhez ennoc'h.*

« *An den ne vev ket hepken gant bara, met gant kement komz a zeu d'ezan eus an Aotrou Doue.*

« *En em garit an eil egile, evel m'am eus ho karet.* »
Hor Salver Jezuz-Krist.

Deveriou ar C'hristen

III. — ANAOUT DOUE AR MAB

Ouspenn m'eo ret d'in anaout reiz Doue an Tad, e tlean ivez anaout ervat Doue ar Mab. Diwar-benn Jezuz-Krist em eus desket er c'hatekiz ez eo heñ an eil Person eus an Dreinded, deut da veza den evidomp, marvet war ar Groaz evit hor pec'hejou.

Hogen, e gwirionez, ha sellet em eus-me biskoaz a-dostoc'h, ha studiet em eus a-zevri ar pez en deus graet evidomp ?

Ret eo d'in soñjal ervat, eur wech bennak, en deus Mab Doue, eil Person an Dreinded Santel, Doue evel an Tad hag evel ar Speread Glan, kemeret eur c'horf hag eun ene heñvel ouz hor re-ni, evit distana kounnar hor c'hrouer, evit herzel ouz e vrec'h da skei war ar bec'herien geiz.

Heñ eo hon *Alvokad*, a gomz hep paouez evidomp ouz Doue an Tad a zo en Neñv.

Heñ eo hor *Beleg*, en em ginnig evidomp war an aoter, evel m'en deus gwechall en em ginniget war ar Groaz.

Heñ eo hor *Pastor*, en deus diskouezet d'eomp an hent a dleomp heulia evit mont d'ar Baradoz.

Heñ eo ar *Skouer* en deus bevet hag a zo marvet evidomp dre garantez, evit lavarout d'eomp e tleomp ni ivez beva ha mervel, ma vez ret, dre garantez evitañ.

Heñ eo Hor *Salver*, dre m'en deus tennet hon eneoù a liammoù Lusifer, a sklavelez ar pec'hed, ha gounezet d'eomp ar vuhez a bad da-viken.

Heñ eo hor *Breur* karantezus, pegwir en deus kemeret eur c'horf hag eun ene evelomp, evit ma vefemp lodek gantañ e mañdou Doue an Tad.

Heñ eo hor *Medisin*, pegwir e wella, dreist-holl e sakramant ar binjenn, ar gouliou a ra d'eomp ar pec'hed.

Heñ eo hor *Bara* pemdeziek, pegwir e ro d'eomp e Gorf hag e Wad da vaga hon eneoù, e sakramant an Aoter.

Heñ eo hor *Roue*, pegwir en deus bet digant Doue an Tad gal-loud warnomp holl, beli war ar bed holl.

Heñ eo hon *Teñzor*, pegwir ez eo evidomp eur vammenn pinvidik a gement gras a zo.

Heñ eo hol *Levenez*, pegwir eo drezañ emaoamp e gortoz da veza, war-lerc'h ar maro, eürus en Neñv.

Heñ eo ar *Wirionez*, pegwir, dre m'eo Doue, ne c'hell na fazia nag hol lakaat da fazia.

Heñ eo hor *Barnour*, pegwir en deus bet gant Doue an Tad gal-loud da varn ar bed ha da rei da bep-unan ar pez a vo dleet d'ezañ.

Na kaer eo soñjal a-zevri en holl vadelezou en deus Jezuz-Krist em c'heñver ! Nag a anaoudegez vat a sav er galon, pa seller a-dost petra eo al Lezenn a Gristeniez !... Ret eo d'in, evit anaout ervat Jezuz-Krist, selaou gant evez ar prezegennou, mont dounoc'h e stu-

di ar c'hatekiz a zo bet desket d'in. Ma ne anavezan ket Jezuz-Krist, gwaz a-se evidoun !

Ouspenn kaout anaoudegez spis eus madou ha madelezo Jezuz-Krist em c'heñver, e tlean c'hoaz lakaat va holl aked da c'houzout ervat e vuhez.

Jezuz eo an eil Person eus an Dreinded Santel, Mab Doue deut da veza den, diskennet war an douar en eur c'hraou ha lakaet en eur prezeb, etre daou loen, hag eno e prezeg d'eomp e tleomp karout an umilite, ar baourentez, ar basianted.

Gouzañvet en deus Jezuz an euzusa gwask en e Basion, ar maro kaleta war ar Groaz.

Savet eo bet, da Sul-Fask, eus a varo da veo anezañ e-unan : setu ar splanna testiñ da welout eo Doue hag eo gwir al Lezenn a zesk d'eomp an Iliz eus e berz.

Daou-ugent devez goude, e pignas dre e c'halloud e-unan d'ar Baradoz, hag eno en deus kement a veli ha Doue an Tad.

Evel Doue emañ Jezuz e kement lec'h a zo, evel den da Doue emañ en Neñv hag e sakramant an Aoter.

Diskenn a ray diouz ar Baradoz, pa zegouezo d'ar bed-mañ echui, evit barn an holl dud ha rei da bep-unan ar pezh en devo gounezet gant e oberou mat pe fall.

Adskrivet gant GOURNADEC'H.

Pedomp an eil evit egile


Setu aman an intansionou a zo bet digaset d'eomp er miz tremenet, ar re varo a zo bet goulennet pedennou evito, ha hanoioù hor madoberourien. Ni hor bezo sonj anezo en hon oferennou hag en hor pedennou, ha goulenn a reomp ivez digant hol lennerien pedi evito.

INTANSIONOU : yec'hed eun den klanv ; konversion eur plac'h yaouank ; eur familh gwasket gant ar boan ; eun den yaouank dilabour.

HON ANAON : Madeleine L'Herrou, Plonevez-du-Faou ; Jeanne Trévidic, Plouhineg ; M. J. Violo, ar Faouët ; Louise Coz ha M. A. Marzin, Plougerne ; M. A. Perrot, Beuzeg-Kap-Sizun ; F. Gallou, Crozon ; An Ao. Poulhazan, bet person e Plougouvelin ; An I. Ancel, Pouldreuzig ; A. Le Hir, C. Mocaër, M. J. Foll, M. A. Ledouren, M. A. Saliou ; A. Saliou, M. J. Halleguen, An J. B. Bourbier, An I. Antony, An I. Capitaine, M. Mazeau, Kastellin ; J. Guernigou, St-Sauveur.

HOR MADOBEROURIEN : eus Gourin : 100 l. evit eneoù ar purgator ; Breuriez T. U. Krac'h : 38 l. ; an Ao. Le Fur : 20 l. ; eus Rianteg : 10 l. evit an anaon ; eus Karnag : 2 l. evit an anaon ; An I. de Kerdrel : 10 l. evit ar misionou ; An Ao. chaloni Charrié : 50 l. evit ar misionou.

Ar re o deus skignet hor c'helaouenn ha digaset d'eomp koumanchoù a enor : 10 l., 15 l. pe 20 l. Ar re-man o deus perz e 365 oferenn, 1850 oferenn pe 3650 oferenn bep bloaz hervez ar pezh o deus roet.



Hon Tenzor !!

O lenn an Aviel pe o klevet e zisplega, hoc'h eus bet meur a wech, moarvat, evel doun va-unan, c'hoantaet beza bet war an douar e amzer hag e bro H. S. J. K.

Selaouit : ne dleomp ket kaout re an holl a avi ouz an dud o deus bet an eurvad-se, rak me a gav d'in hon eus kaeroc'h egeto. Ya, kaeroc'h hon eus : bemdez, e-doug an oferenn, Jezuz a zeu war hon aoteriou ; bemdez, e teu, evel pa lavarfen, d'en em ober den dirazomp. Bez'eman o chom ganeomp : beva a ra en hon touez. Larkoc'h ez an : beva a ra ennoomp.

Mar deo eur mister bras, hag ez eo, e teufe Doue da chom e kalonou krouadurien geiz evel d'omp, eur wirionez eo hag ez eus meneg anezi alies er Skritur Sakr.

Nebeudig amzer a-raok e varo, H. S. a lavare d'e Ebestel : « An neb a gar ac'hanoun, a chom ennoù ha me ennan. »

E leor an Apokalips, sant Yann a laka war muzellou H. S. ar c'homzou all-man : « Setu m'emaou e tal an nor hag o skei warni. Ma klev unan bennak va mouez, e tigor d'in : mont a rin en e di hag ouz taol ez in gantan. »

Gouzout a rit ivez petra a lavaraz Jezuz da Saul — a zeuas da veza an Abostol bras sant Paol, — p'en devoe e ziskaret diwar e varc'h war hent Damas : « Perak 'ta e rez brezel d'in-me ? »

Evesait mat ouz ar c'homzou-se. Jezuz ne lavar ket : « Perak e rez brezel d'ar gristenien (d'ezo eo koulskoude e rae brezel, int-i eo e klaske paka evit o chadenna hag o zeurel er prizon) ; nann, ne lavar ket an dra-se, met perak e rez brezel d'in-me hag a zo o chom e kalonou ar gristenien ? »

Daoust ha neuze eo ec'h ententas sant Paol ar wirionez-se ? — Marteze, met ar pezh a zo sur, eo e tiazegas warni e holl gelenadurez.

Epad ar rest eus e vuhez, ne ehano da zeski d'eomp omp izilli, memproù eus ar C'orf m'eo J. K. e-unan ar penn anezan.

Lavaret a raio, hag er c'homzou-se e kavomp an diverra eus e holl geennadurez, lavaret a raio : « *Beva a ran. Nann, n'eo ket me eo a vev : ar C'hrist eo a vev ennoun.* »

Mar deo gwir kement-se ,pa vezomp bet o taoulina ouz an daol santel ha keit ha ma pad doareou ar bara m'eo kuset Jezuz dindano, eo ken gwir all da-c'houde keit ha ma vezomp e stad a c'hras.

Ha n'eo ket Jezuz hepken a zo ennomp, met an Dreinded santel. Pa deu unan anezo da berc'henna eun ene, an daou all, rak ne c'hellont ket beza dispartiet an eil diouz egile, a deu ivez d'e heul. An dra-se eo, moarvat, a verk ar c'homzou dous ha tenerman : « *Ma kar unan bennak ac'hanoun, eme Jezuz, va Zad a garo anezan ; ennan e tiskennimp hag ennan e chomimp.* »

Gwechall, war a leverer, Leonidas, tad unan eus ar brasan sperejou a zo bet en Iliz, a gare tostaat alies ouz ar c'havel ma kouske ennan e grouadur. Goude beza dizouchet eun tammig e beultrin, e lakae gant ar brasa doujans eur pok warnan en eul lavaret : « *Adori a ran Doue a zo e kalon ar c'hrouadurig-man.* »

— *Ha kredi a rit-hu, a c'houlenne, eun deiz, eur gouarner ouz santez Lusía, eman ar Spered-Santel ennoc'h ?*

— *Ya, emezi, kredi a ran eman ennoun hag e kement den a sq e stad a c'hras.* »

Pebez enor beza templou an Dreinded santel ! Pebez tenzor bras a zougomp ennomp !

Daoust ha sonjal a reomp a-walc'h e kement-se ?

Tadou ha mammou kristen hag a fell d'eoc'h e vije ho pugale bepred pur ha chast, livirit d'ezo alies : « *Va mab, va merc'h, c'houi a zo templou an Ao. Doue, mirit mat an tenzor kaer a zougít*

Hag evit-se, bezit war evez dalc'hmat ha sellit mat e-pelec'h bale. »

TREMEUR.


Lennit mat

ar bajenn diweza eus ar golo :

Un bulletin paroissial

pour chaque paroisse !!

Evidoc'h eo skrivet !



Eus pelec'h e teu beleien d'an Iliz

Hor Salver a zibabas e ebestel e-touez tud a renk izel, tud paour, hep deskadurez, pesketaerien kalz anezo.

Ar pezh a c'houlenn Hor Salver, eo m'o devezo an ebestel hag ar re a zeulo war o lerc'h, youl santel da labourat evit silvidigez an eneou.

Abaoe penn kenta an Iliz, ez eus bet gwelet e renk an eskibien hag ar veleien tud a bep stad, lod paour, lod pinvidik, lod eus familhou bras, lod eus familhou dister diwar ar maez. Unan eus ar Babed brudeta, sant Gregor VII, a oa mab d'eur c'halvez eus an Toskan, Pi X, bet pab n'eus bet pell, a oa ivez eus eur familh baour.

A-wechou ar veleien a zeu eus familhou bras. En deiz a hirio, evel gwechall, e weler tud o trei kein da vadou ha da enoriou ar bed evit labourat da c'hounit eneou da Zoue.

D'an 12 a veurz 1932, an aotrou Izart, arc'heskob Bourj, a roe an urz a abostoler d'an aotrou Butel, doktor war al lezennou ha bet mestr-barner e Sancerre hag e Châteauroux. D'an 29 a vezeven eo bet beleget.

D'ar 26 a veurz 1932, derc'hent Pask, an aotrou Baudrillart, arc'heskob, a roe, e iliz Karmez Pariz, an urz a velegiaj d'an aotrou Pierra, bet e skol vras Polyteknik, bet letanant-kolonel ha gounezet gantan ar groaz a enor.

D'an hevelep mare, an doktor saoz Cantell a voe beleget e Rom. Eus ar Skol Centrale, skol vrudet meurbet e Pariz, ez eus deuet a nevez 'zo daou veleg : an aotrou de Gibon, beleget d'an 2 a viz here 1931 e Pariz, hag an aotrou Mazerat, beleget d'an 29 a vezeven diweza.

Er Bavier (Allemañ) an aotrou Per Claer, bet alvokad brudet, a gwitae ar bed e 1926 hag a zo ivez nevez beleget.

En eur gelaouenn eus Pariz e c'helled lenn, n'eus ket pell, an istor-man c'hoarvezet en eun hent-houarn tost da Bariz. En eur wagon e oa eur brabanser, enebour touet d'an Iliz ha d'ar veleien, ha ne rae nemet o dispenn :

« *Ar veleien, emezan, a zo tud dizesk ; n'ouzont netra.* »

Hag en eur drei e zaoulagad etrezek daou veleg a oa azezet dirazan, sioul, e lavaras :

« *An holl a oar mat n'eus o vont da veleien nemet ar re n'int mat da netra, ar re n'int ket gouest da gregi en eur vichel all.* » An daou veleg a vouc'hoarzas, ar pezh a lakeas ar brabanser e kounnar :

« *Ya ! c'houi, lavarit d'in, petra ho pije graet, ma ne vije ket bet war ho kein ar soudanenn zu ?* »

Neuze an aotrou *Renaud*, bet gwechall er Skol Centrale, bet kabiten kanolier, a ziskouezas e gartenn.

An eil, ar *Breur Colomban*, eus a Urz sant Fransez, a oa bet e skol an ofiserien war vor, a oa bet e-unan kabiten dindan an hano a *Achille Lefèvre* a zouge a-raok beza lean.

Spered Doue a c'houez el lec'h ma kar.

An Iliz he deus goulennet sikour :

« *Ezomm am eus beleien, emezi.* »

Hag ar veleien a zo deuet. E kloerdi Pariz, en deiz a hirio, ez eus eun niver bras a gloareged hag o doa er bed kargou bras hag enorus. Dre garantez evit Doue hag an eneoù, o deus dilezet ar bed.

N'eus ket c'hoaz, e pep lec'h, a gloareged a-walc'h war an hent da vont da veleien. Pedomp eta ar Mestr da zigas eosterien evit labourat en e bark, e park an eneoù, ma vo gelllet gounit an eneoù-se hag o gorrenn e grignol an Tad a Familh.

Y. U.



.....
Karit ho parrez !
Karit hoc'h iliz-parrez !
Skoazellit beleien ho parrez !
Ho tener eo !
Ho mat eo ivez !!
.....

TEIR AVE AR FORBAN

D'an amzer ma chomen e kouent N. en enez Korz, e teuas, eun devez, eur mesaer da c'houlenn komz ganin. Gwelout a ris dirazoun eun den azezet e benn etre e zaouarn hag e seblante beza gwall-strafuilhet :

— « *Petra nevez, va den mat ?* »

— *Tad, emezan, va digarezit, ma plij, eur servij bras a c'hortozan eus ho perz.*

— *Petra eo ?*

— *Eun niz, graet gantan eur torfed breman 'zo 12 vloaz evit kastiza eun dismegans grevus graet d'e c'hoar, ar niz-se a zo o vervel hag a fell d'ezan kaout eur beleg.*

— *Mat, me a ya ganeoc'h dioustu.*



Setu-ni dirak lochenn ar forban...

— *Siouaz ! an archerien ha va enebourien a zo war evez ; ma vezomp gwelet asamblez, e vo kavet repu va niz. Deut kentoc'h warc'hoaz, war-dro 9 eur war lez ar c'hoad, me a vo eno.* »

— *Sonjit, Tad, hon eus war-dro 5 leo d'ober war droad.*

— *Na petra 'ta ! Savomp ha deomp hep-dale !*

Antronoz, e kavis va mesaer el lec'h merket. A-benn 20 munutenn vale, setu-ni dirak lochenn ar forban, eul lochenn hep prenestre na siminal.

O welout ac'hanoun, a teuas an daerou e daoulagad ar c'hlanvour. Azeza a ris war eur skaon hanter-vrein, hag ar mesaer ha mont er-maez.

Ar forban n'en doa nemet 36 vloaz, met gant e vleo gwenn hag e varo louet, e vije bet kemeret evit eun den koz :

« Trugarez d'eoc'h, emezan, da veza deut betek ennoun. Aon am boa da vervel hep beleg. An Itron Varia, hag a bedan bemdez, n'he deus ket va dilezet. Setu aman, a-raok kofes, eun tamm sell war va buhez.

N'em eus bet biskoaz nemet eur c'hoar. Desket hon eus bet digant hor mamm karout an Aotrou Doue hag ar Werc'hez Vari. Bep noz e lavaremp asamblez hor chapeled, ha da-c'houde TEIR AVE MARIA gant ar c'homzou-man : « O VA MAMM, DIWALLIT AC'HANOUN, EN NOZVEZ-MAN, DIOUZ AR PEC'HED MARVEL. » D'ar mintin adarre ar memes pedenn.



P'en em gavis eun devez dirak tri zen ganto o fuzuilhou ; va faotr a oa unan anezo...

Chomet oun bet kristen mat betek an oad a 21 bloaz. A-raok mont da soudard, va mamm a stagas em c'herc'henn medalenn ar Werc'hez a welit aze, hag a c'houlennas diganin beza fidel bemdez d'an 3 AVE MARIA.

*
**

Graet ganin eur bloaz kazarn, e klevis kelou eus an dismegans c'hoarvezet gant va c'hoar. Eun devez eta, e tec'his diouz an arme en desped d'am mistri evit kastiza an den fall en doa manket d'an hini a garen. Ne zaleas ket an dud da c'houzout e oan dezertour, ha setu an archerien war va seuliou.

Tremen a ris eur bloaz hep kaout va enebour war va hent, p'en

em gavis eun devez dirak tri zen ganto o fuzuilhou ; va faotr a oa unan anezo. Eun tenn, ha setu ar paour-kaez o koueza maro-mik.

Graet ganin va zorfed, e klevis dioustu mouez va c'houstians, hag abaoe, peoc'h ebet d'am spered. Daouzek vloaz 'zo emaoun o redek eus an eil tu d'egile gant aon da veza paket gant an arc'herien. Lavarout a raen bemdez va chapeled, ha pa c'hellen, e raen eun aluzen bennak evit kaout ar c'hras da gofes eun dervez va fec'hejou.

Klanv oun eur bloaz 'zo hep beza bet medisin ebet war va zro. Ha breman, va Zad, daoust ha pardonet a vo d'in va holl fallagriez. Touet em boa na lazfen biken den ebet, ha bet oun bet fidel d'ar promesa-se graet d'ar Werc'hez.

Daoust ha Doue a bardon ar vuntrerien ?
— Bezit fizians, Doue a well ho klac'har, an DEIR AVE MARIA lavaret en enor d'ar Werc'hez o deus talvezet d'eoc'h ar pardon. »

Kofes a reas, ha da-c'houde ha me rei d'ezan an Nouenn.
« Va Zad, emezan, mervel a ran breman a galon vat. Mil trugarez d'eoc'h. Pedit evidoun, ha dreist-holl pa ho pezo kelou eus va maro. »

D'an noz war-lerc'h e varve en eur lavarout hanoiou sakr Jezuz ha Mari.

Oferenna a ris evitan. Graet en doa eur pec'hed bras ; met ne chomas ket aheurtet.

An Itron Varia, en doa laket enni e holl fizians, he doa goulennet evitan ar pardon.

An istor-man, gwir penn-da-benn, a ziskouez d'ar mammou pegen talvoudus eo an deskadurez kristen. Ar vugale savet mat a chom, peurvuia atao, gwir gristenien. Ma teuont, eun devez, da guitaat hent ar furnez, evel ar forban-man, ar c'henteliou santel bet digant o mammou, a roy d'ezo ar c'hras da zistrei ouz Doue, da vihana d'an eur diweza.

Tad JEROM O.F.M.



D'hol lennerien

Abalamour d'ar prez-labour a zo bet warnomp abaoe eun nebeut sizunvezioù, ez eus marteze unan bennak eus hol lennerien ha n'eo ket bet servijet evel ma c'houlenne. Pedi a reomp anezo d'hor digarezi ha d'her rei d'comp da anaout ar c'henta ar gwella.

En amzer-da-zont ne c'hoarvezo mui hevelep faziou.

Pajenn an Unvaniez katolik

Dourn - ouz - dourn !!

Evel ma lavaremp er miz tremenet, Katoliked Frans, ma fell d'ezo mirout ouz o bro da veza hep-dale eur vro dizoue, a dle en em starda an eil ouz egile ha staga d'al labour.

Betek-hen, a-dra-sur, ez eus bet kavet en o zouez meur a hini hag a laboure kalonek evit ar relijion. Atao e vezont war an dachenn, atao e roent, evit difenn o feiz, neket hep-ken o arc'hant, met ivez o amzer, o yec'hed, ha pa veze ret, zoken o buhez. Enor ha meuleudi d'an dud-se !

Met ar gatoliked all, al lodenn vrasa anezo, petra 'raent ?

Lod anezo a chome da sellout ouz ar re genta o stourm. War o meno, neket d'ezo e oa difenn ar relijion : « An dra-se, emezo, eo AFER AR VELEIEN. »

Hag e gwirionez, evit diwall ar relijion ouz pep droug, evit mirout ouz ar groaz da veza stlapet er-maez eus ar skoliou hag eus al leziou-barn, evit mirout ouz an ilizou da veza laeret ha draillhet an noriou warno, evit derc'hel ar relijused en o c'houentchou, WAR BIOU E KONTENT ?

WAR AR BELEG !! HA WAR AR BELEG HEPKEN !

PEBEZ FAZI ? — War an dachenn a vrezel, piou a dle diwall ar vro diouz pep droug ? Piou a dle gounit ar viktor ? Ar jeneral ? ar ofiserien ? — Ya, int a-dra-sur, met n'eo ket i hepken, met ivez, ha dreist-holl, ar SOUDARDED.

Hep an ofiserien, ar soudarded n'hellont netra. — Met an ofiserien o-unan, hep ar soudarded, petra c'hellont ? NETRA.

Hogen, katoliked, ar veleien eo an ofiserien e arme Hor Salver Jezuz-Krist. C'HOUI EO AR SOUDARDED.

Hep ar veleien, petra' c'hellit-hu ? NETRA.

Hag ho peleien, ma n'emaoc'h a-du ganto, ma ne staget ket d'al labour asamblez ganto, petra c'hellont ? NETRA.

An eil hep egile, n'hellit netra. MET AN EIL GANT EGILE, DOURN OUZ DOURN, UNANET dre ho feiz hag ho karantez, n'eus netra hag a c'hellfe herzel ouzoc'h. C'houi a c'hell savetei ar vro hag ar bed !

Plijet gant an Ao. Doue rei d'eoc'h ar wirionez-se da gompren !



Evit ar re a zo enep ar relijion...
Evit ar re o deus douetans warni...
Hag ivez evit ar re a zo a-du ganti...

RE A VISTERIOU ?

« Me garfe a-walc'h heulia ar Relijion, a lavar meur a hini, met evelato re an holl a visteriou a zo enni. Ne gomprenet netra...
« Penaos kredi en traou souezus a glever komz anezo ? E gwirionez, kalet eo kredi er pezh na gomprenet ket. »

Bez' ez eus misteriou er Relijion ? — Ya, sklear eo kement-se. — Hag eo abalamour ma ne gomprenit ket ar misteriou-se, ne fell ket d'eoc'h kredi ? — Geier a lavarit !

Eur bern misteriou a zo ennoc'h, en-dro d'eoc'h, dreist ho penn hag a-zindan ho treid. Ya, griet oc'h a visteriou, beva a rit e-kreiz ar misteriou : ha koulskoude e kredit enno hep beza souezet, daoust ha ma ne gomprenit ket.

*
**

Lavarit d'in, ha kompren a rit perak e c'hellit finval ho treid, ho taouarn, ha pas ho tiskouarn ? Eur MISTER eo evidoc'h.

Petra eo ar c'houesket ? Diskouarn eun den kousket a zo digor kaer ; ha koulskoude ne glev netra ? Perak ? Kompren a rit ? MISTER !!...

Chomit eta eun nebeudig amzer hep teurel en ho kof magadurez, traou maro koulskoude, evel kig, bara, leaz hag all... Petra zigouezzo ganeoc'h ? Ar maro. Penaos e komprenit e teu an traou-se da veza ho korf, ho kwad, ho puhez ? MISTER adarre !!

Hag anaout a rit al louzaouenn : « belladonn », bokedou ruz d'ez i ? Sevel a ra dindan gwez ar c'hoajou ha war an aod sablek, war ribl ar mor bras. Dougen a ra greun du evel gwiniz du bihan

pe biz du. Hadit greun « belladonn » en ho liorz, war eun dro gant piz du. Pa vo dare ar greun, dastumit-i .Grit eun tammig friko gant piz du, ha drebit : an dra-se a ray vad d'ho kalon.

Grit, eun deiz all, eun tammig friko ivez gant greun belladonn hepken, ha drebit ...pe gentoc'h, diouallit da zrebi : rak, gant al loiad genta, e chomfec'h klanv da vervel, ha ne vefe pare ebet d'eoc'h.

Perak eur c'hemm ken bras etre an daou seurt had-se ? Lakaet int bet en hevelep douar ; an memez amzer a zo bet warno, ar memez glao, ar memez heol. Perak eta e kaver gant unan ar vuhez ha gant eun all ar maro. Ha kompren a rit ? MISTER adarre !!

Teurel a rit eun hadenn en douar. An hadenn-se a zeu da vreina, hag e-lec'h mervel, e ro ar vuhez d'eur blantenn, d'eur wezenn kant ha kant mil gwech brasoc'h egeti.

Eur wezenn dero, hag a sav e kourrou uhel dreist ho parkeier, eus a-belec'h e teu ? Eus eur vezenn ha n'oa ket brasoc'h eget penn ho piz bihan. Ha kompren a rit ? MISTER !!

Petra eo an elektrisite ? MISTER !!

Perak, e bolz an nenvou, pa sellomp eus an hanter-noz, e kerz an heol hag ar stered eus an tu dehou d'an tu kleiz ha n'eo ket eus a gleiz da zehou ? Mister an Aotrou Doue, ne gomprenomp ket, hag eo ret d'eomp kredi !!

Diouz an noz, pa vez splann an amzer, sellit er vann ha lavarit di'n penaos, gant an diou voulig vihan du pe c'hlaz pe yell a zo en ho penn — da lavaret eo gant ho taoulagad — e c'hellit, en eun taol, gwelout ar stered, kant ha kant mil leo eus an douar ? Kompren a rit ? MISTER !

Taolit breman eur mean en car ; pa vo kollet e diz gantan, e kouezo d'an douar.

Lavarit d'in neuze perak al loar, hanter kant gwech bihannoc'h eget an douar, ne gouez ket warnomp, met a gendalc'h d'hor sklerijenna hep koueza en nep lec'h.

O ! c'houi a lavaro gant an dud desket ez eus daou seurt nerz hag a chach al loar eus eun tu war-zu an heol hag eus eun tu all war-zu an douar, hag evel ma 'z eus kempouez etre an daou nerz, al loar ne deu morse da dourtal an douar. Daoust ha kompren a rit kement-se ? MISTER atao !

Misteriou eleiz a gavomp e kement tra zo.

Ha koulskoude — ha pouezit mat ar ger-man — e KREDIT ER MISTERIOU-SE ; ha c'houi a gred enno HEP BEZA SOUEZET, daoust ma n'o c'homprenit ket ; rak ne c'hellit ket miret d'o c'hredi ; ar wirionez a darz dirak ho taoulagad.

PERAK ETA NE FELL KET D'EOC'H HEULIA AR RELIJION WAR ZIGAREZ MA KAVER ENNI MISTERIOU ? Ha perak beza souezet a gement-se ?...

Petra ! c'houi a gav misteriou en eur c'hrouanenn hag en eur yeotenn a vresit a-zindan ho treid, hag e kredit enno hep marc'hata.

En eur ger, c'houi a gred er misteriou a zo en traou distera, ha ne gredfec'h ket er misteriou a zo en traou brasa, uhela, dounna, evel m'eo Doue, an Eternite, ar maro, hag all.

A ! e gwirionez, nag oc'h diskiant !

Eun tammig, sellit ez oc'h henvel eus eur Roue morian hag a veze graet Tagouli anezan. Heman a oa e penn eur rouantelez e-kreiz an Afrik, e-lec'h m'eo tommoc'h e-pad ar goanv eget m'eo en hor bro e-pad an hanv.

Eun devez en em gavas eur misioner e vro-se evit ar wech kenta ; hag hen ha mont da welout ar Roue Tagouli evit goulenn digantan aotre da brezeg an Aviel en e rouantelez. Biskoaz n'en doa Tagouli gwelet c'hoaz den eus an Europ. Ar Misioner, evit gounid Tagouli, a gomz d'ezan diwar-benn eur bern traou a weler en hor bro : keriou bras, hentchou houarn, ilizou kaer, telegraf, elektrisite...

Ha setu ma lavar c'hoaz ar Misioner eo dishenvel kaer hor bro diouz ar vro-se...

— « Er goanv, ganeomp-ni, emezan, e teu ar gwez, an tiez, ar parkeier da veza gwenn kann gant an erc'h a gouez eus an Nenv.

— Ha zoken an dour, er steriou hag er c'hanoliou, a zeu da veza ken kalet, pa vez skourn, ma c'hell an dud, al loened, ar c'hirri, bale warno hep aon, evel ma valeit aman war an hent-bras... »

— A-walc'h, chomit peoc'h ! estranjour gaouiad, a respont Tagouli ; betek vremen em eus ho selaouet gant plijadur. Met, re ho peus lavaret, chomit a-sav pelloc'h !... Penaos !... an dour, dont da veza kalet evel eun hent-bras ! Biskoaz kemend-all ! kollet eo ho penn ganeoc'h. Allo, kerzit pelloc'h ; er-meaz eus va zi, ha buhan, petra !!!... »

Ar paouar-keaz Tagouli ! Lavarit d'in, gant piou eman ar wirionez, gantan pe gant ar Misioner ?

Evel-se ivez eman ar gaou gant ar re na gredont ket misteriou ar Relijion.

DIOUALLIT DA VEZA HENVEL EUS TAGOULI !!!...



Evidoc'h-c'houi, tud yaouank

Digareziou !!

« Amzer 'zo... »

Pa vez komzet da yaouankizou a zo eus ober eur retred, heulia eur mision, ober eur gofesion evit dizrei ouz Doue pe evit en em wellaat nemetken, e vez klevet ar c'homzou-man :

« Amzer 'zo ; me 'zo yaouank c'hoaz... »

« Amzer 'zo », a lavarit. Diouz ho klevet, An Aotrou Doue en deus roet d'eoc'h da anaout ar poent ma vezo ret d'eoc'h kimiadi diouz ar bed-man !

Koulskoude Hor Salver en deus diskleriet : « Bezit war evez, rak Mab an den a zeuio, pa ne vezoc'h ket o sonjal. Dont a ray evel eul laer e-pad an noz... »

Eur paotr yaouank a rene eur vuhez direiz. Gourdroutzet gant Santez Mari-Madalen a Bazzi, e responte bep tro : « Amzer am eus ! N'em bezo nemet kofes ar pec'hejou-se a-raok mervel. »

Eun dervez m'edo ar Santez aet anezi he-unan, e voe klevet o lavaret : « N'eo ket falvezet gantan kredi ! N'eo ket falvezet gantan ! »

Deut enni he-unan ha goulennet diganti petra dalveze ar c'homzou-se, e tisklerias : « An den yaouank-se n'en deus ket sevenet va ali. Maro eo. Barnet eo ha barnet d'an ifern ! »

Ar paotr yaouank all-se hag a oa hano anezan n'eus bet gwall-bell er c'hazetennou, a gave d'ezan kaout amzer ivez, moarvat ! — Marvet eo etre divrec'h e gavalierez ... o tansal !

Na lavarit ket, tud yaouank : « Amzer am eus » Rak an amzer a zo da Zoue. . . Ar poent breman a zo d'eoc'h ; an hini a zeuio warlerc'h, n'eo ket marteze. Hag e lakoc'h silvidigez hoc'h ene war eur « marteze ! »

Na lavarit ket kennebeut : « yaouank oun c'hoaz ; ne varvin ket c'hoaz ; amzer am eus da zizrei ouz Doue... »

Pemzek dervez goude m'oun en em gavet er gêr o tont eus eur barrez e-lec'h ma oan bet o rei eur mision, setu aman ar pez e klevet : eur vaouez a 42 vloaz n'he doa ket fellet d'ezhi ober he mision ; lavaret a rae : « Amzer am eus, n'oun ket koz c'hoaz... » Hogen dek devez goude ar mision e voe kaset he c'horf d'ar vered.

Taget e oa bet gant ar c'hlenved ha sammet e oa bet gant ar maro. — Pedi a reas ar Werc'hez eürusamant ; gallet a reas kofes, met kaer e oa bet ober, n'hellas ket komunia.

Paotred ha merc'hed yaouank, m'hel lavar d'eoc'h, c'houi, koulz hag ar re goz, bezit prest !!

BROGAROUR.



MIZ C'HOUEVRER 1933

| Deizlou | GOUELIOU | Induljansou |
|---------|--|-------------|
| 1 M | S. Ignas E. ha M. — P. E. Viridiana Gw. 3 U | I. L. |
| 2 Y | Gouel ar Chandelour | A.J.-I.L. |
| 3 G | D. E. Maze E. 1 U | |
| 4 S | S. Jozef a Leonis 1 U | I. L. |
| 5 S | 5 ^{te} goude gouel ar Rouaned. — S. Per Badezour hag e Gompagnunez MM. | I. L. |
| 6 L | S. Tit E | |
| 7 M | S. Romuald, abad | |
| 8 M | S. Yann a Vatha | |
| 9 Y | S. Siril E. ha D | |
| 10 G | S. Skolastik Gw | |
| 11 S | Goue Itron Varia Lourd | |
| 12 S | Septuajezim | |
| 13 L | P. E. Eustochium Gw. 2 U | |
| 14 M | P. E. Andre, Rizzier hag Anton 1 U | |
| 15 M | SS. Faustin ha Jovit MM. | |
| 16 Y | P. E. Filipa Gw. 2 U | |
| 17 G | D. E. Luc Belludi 1 U | |
| 18 S | Ofis ar Werc'hez | |
| 19 S | Sexajezim. — S. Konrad 3 U | I. L. |
| 20 L | D. E. Per a Dreja 1 U | |
| 21 M | Ofis an deiz | |
| 22 M | S. Marc'harid a Gorton 3 U | I. L. |
| 23 Y | S. Per Damian E. ha D | |
| 24 G | S. Mathias abostol | |
| 25 S | P. E. Izabel Gw. 2 U | |
| 26 S | Kuinkuajezim | |
| 27 L | Ofis an deiz | |
| 28 M | P. E. Antona a Florans Int. 2 U | |

EVIT KOMPREN AL LIZERENNOU MERKET AMAN.

A. J. = Absolvenn jeneral, gant eun induljans leun d'he heul ; ret eo mont da gofes, da gomunia ha pedi evit H.T.S. ar Pab. — An absolvenn-se a c'hell beza roet : er gador-gofes, goude ar gofesion, gant ar bedenn verr lavaret gant n'eus forz peseurt kofesour, adalek an deiz a-raok ar gouel, diouz ar mintin, betek fin an deiz diweza eus an eiz dervez a zeu goude ; e publik, gant ar bedenn hir, en deiz a-raok ar gouel, adalek kreizteiz, da zeiz ar gouel hag e-pad ar seiz dervez a zeu goude.

I. L. = Induljans leun gant ar c'hondisionou ordinal : kofesion, komunion, eur vizio d'eun iliz, eur bedenn evit H.T.S. ar Pab. — Ar gofesion a c'hell beza graet eiz deiz a-raok ar gouel, da zeiz ar gouel, pe en unan eus ar seiz dervez a zeu goude ; ar gomunion a c'hell beza graet d'an deiz a-raok ar gouel, da zeiz ar gouel pe en unan eus ar seiz dervez a zeu goude. — Ma n'eus iliz ebet hag a vefe da unan eus Urziou S. Fransez, e c'heller bizita an iliz parrez ; ar re glanv a lavar 5 Pater hag Ave e plas ar vizio ; e-giz pedenn, e tleer lavarout da-vihana 1 Bater-Ave-Gloria.

K. = kofesour ; D. = doktor ; E. = eskob ; M. = merzer ; P. = pap ; D. E. = den-eürus ; P. E. = plac'h-eürus ; Gw. = gwer-c'hez ; I. = intanvez ; 1 U. = eus ar genta Urz ; 2 U. = eus an eil Urz ; 3 U. = eus an Drede-Urz.

Un Bulletin paroissial pour chaque paroisse !!

Plusieurs membres du clergé paroissial nous ayant demandé s'il ne serait pas possible d'ajouter à « *La Vie Chrétienne* » une partie spéciale à chaque paroisse, nous avons étudié les conditions auxquelles cette transformation pourrait se faire ; les voici :

Combinaison A

(pour un minimum de 100 exemplaires)

4 pages de texte paroissial (servant de couverture) et 16 pages de texte commun (français, breton de Quimper ou breton de Vannes, suivant le désir de chaque abonné).

La page 1 de la couverture comporte un cliché-titre fourni par nous (nous envoyer photos, cartes postales, pour faire exécuter le dessin).

Le bulletin est livré piqué, rogné et est expédié par la poste à chaque abonné. — Le premier numéro est fourni gratuitement en vue de la propagande, à raison de 1 exemplaire par famille. — Sauf avis contraire, nous corrigeons nous-même toutes les épreuves.

Abonnement simple : 8 fr. par an.

Abonnements d'honneur : 12 fr. avec participation à 365 messes célébrées tous les ans pour nos bienfaiteurs.

20 fr. avec participation à 3650 messes.

Combinaison B

(pour un minimum de 500 exemplaires)

8 pages de texte paroissial et 16 pages de texte commun. — Les autres conditions sont les mêmes que pour la combinaison A.

Abonnement simple : 8 fr. par an.

Abonnements d'honneur : 12 fr. avec participation à 365 messes célébrées tous les ans pour nos bienfaiteurs.

20 fr. avec participation à 3650 messes.

Envoi sur demande de tous renseignements complémentaires et de spécimens gratuits de bulletins paroissiaux.